

Kenstrivadeg ar yezhoù keltiek

Lennit ha votit dre ar genrouedad d'ar Sadorn 21 a viz Mezheven 2008
Azalek bremañ e c'hellit klevout ar c'hanaouennoù dibabet war al lec'hienn **Nos Ur**



BREZHONEG a vo er genstrivadeg **NOS UR** gant **GWENNYN** !
Emgav d'an 21/06 ha votit war ho lec'hienn !

<http://www.nos-ur.eu/>
<http://www.myspace.com/gwennyn>

Dibabet eo bet ar ganaouenn "Bugale Belfast"

NOS UR a zo ar genstrivadeg kentañ evit kanerien ar yezhoù keltiek.
Dont a ra da genglotañ gant kenstrivadeg veur ar yezhoù minorelaet en Europa a vo
dalc'het d'an 18 a viz Here 2008 e Lulea, e Hanternoz Sveden.

Ar yezhoù a vo er genstrivadeg : yezhoù bro Skos, Ulster, gouezeleg bro Skos hag Iwerzhon,
Manaveg, kembraeg, kerneveureg ha **brezhoneg**.

12 kaner a zo bet dibabet evit ar genstrivadeg.

En nozvezh-se e vo dibabet div ganaouenn (gant ur juri er sal hag juri ar publik),
kannaded ar broioù keltiek er genstrivadeg europat e Sveden.

Ur c'haner a vo dibabet en nozvezh-se etre 7e30 ha 9e00 pm (eur bro Skos) gant juri ar publik dre
votiñ war al lec'hienn

<http://www.nos-ur.eu/> etre 8e30 ha 10e noz.

Un all a vo dibabet gant ur juri dizalc'h savet gant tud vrudet eus ar broioù keltiek (den ebet eus Breizh).

! Ur genstrivadeg par da hini an Eurovision e vo !
evit ar yezhoù minorelaet nemetken.

*En ur lakaat kanerien ar yezhoù keltiek war wel e tizh aozerien ar genstrivadeg-se meur a bal : diorren
ar sevenadurioù minorelaet en Europa dre ar c'hrouiñ hag ar sonerezh*

hag embann an abadenn dre ar c'hleweled, ar c'hazetennoù evit broudañ ar yezhoù
ha broioù minorelaet en Europa.